

Recueil de Cantiques

A SAINT YVES



LES PRESSES BRETONNES — SAINT-BRIEUC

Imprimatur :

Brioci, die 2^a Maius 1956.

EGG. LE BELLEC,

Vic. gen.



A Monseigneur S. Yves de Kermartin

REFRAIN

*Saint Yves, notre Père,
Toi que nous implorons,
Reçois notre prière
Et bénis tes Bretons.*

La Bretagne t'appelle :
Tu l'aimais autrefois ;
Sois-lui toujours fidèle
Et reconnais sa voix.

Le laboureur t'implore
En creusant le sillon ;
Donne lui, donne encore
Abondante moisson.

Guide sur l'onde amère
Le nautonnier breton ;
Pour lui, dans la chaumière,
On invoque ton nom.

Bénis la main qui donne,
Et le pauvre sans lieu,
A la table bretonne,
Aura la part de Dieu.

C'est la veuve craintive,
L'orphelin sans tuteur :
Ils t'adjurent, saint Yves,
D'être leur défenseur.

Fais croître la science
Dans l'esprit des enfants ;

Garde leur innocence,
Aux jours de leur printemps.

Le pécheur qui sommeille
A l'ombre de la mort,
A ta voix se réveille
Disant : je crois encor.

Anime de ton zèle
Le zèle du Pasteur ;
Saint Yves, son modèle,
Féconde son labeur.

Conserve-nous entière
La foi que nous aimons,
La foi vive et sincère
Qui fit les Saints Bretons !

Que l'antique droiture,
La gloire du pays,
Demeure toujours pure
Dans le cœur de ses fils.

De Rome et de la France
Viens calmer les douleurs :
Ramène l'espérance
Et la paix dans les cœurs.

Entends notre prière,
Et, nous t'en conjurons,
Sois à l'heure dernière
L'avocat des Bretons.

Kantik neve en honor da Zant Erwan.

WAR DON : *Gwerz kok Zant Erwan*

1

En kreiz an drizekved kantved,
Tost da Landreger oa ganet ;
War douaro ar Minihy,
En Kervarzin e oa he dy.

DISKAN

Pedomp, pedomp a greiz kalon,
Pedomp Zant Erwan hon Faeron,
Ma vo bepred bon Avokad
Dirak Hon Zalver hag he Dad.

2

D'ean, en kichen e gavel,
Doue lakas eur vamm zantel,
En he c'halon ar brasan c'hoant
E vije he mabik eur zant.

3

Evit d'he vamm kad 'ne genver
Eur garante nerzuz, tener :
« W-lloc'h, emei, eo d'it mervel
« 'Vit ober eur pec'hed marvel »

4

O Zant Erwan, dre ho pedenn,
Zikouret ar mammo kristen
Da zevel mad ho bugale,
D'no zevel en doujans Doue.

5

Er ger. en-pad e iaouankiz,
Ha diwe-toc'h en Pariz,
Erwan 'roë da dud e noad
Skuerio zantel, kelenno mad.

6

Ra vo. dre holl, en Breiz-Izel,
An dud iaouank outan henvel,
'Vit ma c'hellfiot, o vean fur,
Chom korf hag iné bepred pur.

7

Dre ma oa Erwan zantel bras,
Eskob Treger hen delegas ;
Hag ar zant, en he stad neve,
A deuz zanteloc'h bemde.

8

En Tredrez, hag en Louanek,
E labouras ken kalonek
Ma lakas an holl vertuio
Da diwanan er c'halono.

9

Zant Erwan, deus ar baradoz,
Ni ho ped, skuillet ho penoz
War veleien hon farroujo
Karget d'hon c'has holl d'an
[Neuvo.

10

Erwan a rae d'ar bec'herien
Dont da vean gwir gristenien ;
Dre he gomzo, fe an dud vad
A deue bemde da grenvat.

11

Zant Erwan, evidomp goullet
Ar c'hras da drei kein d'ar pe-
[c'hed,
Ha da delc'hel ar fe 'n'hon bro
Gwriennet stard 'vel an dero.

12

Erwan a oa den a beden,
Har ive den a binijen ;
Na weler den o vont da zant,
O kad d'e gorf re a damant.

13

'Vit plijout d'hon Faeron Zantel,
Bemde da bedi 'vimp fidel ;
Ni delc'no mad da lezenno
Ar c'hoariez hag ar vijelo.

14

En kenver an dud ezommek
Erwan oa meurbed karantek ;
Eu o c'henver e oa ken mad
Ma hanvent anean o zad.

15

Eveltan a die peb kristen
Herve ma c'hell, rei aluzen ;
An aluzen 'ra da Zoue
Skuill e venoz war an ine.

16

Bevet en deus hon Faeron ker
War hon mezio pellik amzer ;
Tostik d'ar mor eo bet ive
Eur loden vras eus he vue.

17

O Zant Erwan roët eta
Ho penoz da dud ar vro-ma ;
Beniget ar re a labour
War an douar, pe war an dour.

18

En Breiz, ha zoken en pell bro,
Erwan eo brudet e ano
Dre ar burzudo en neus graet
'Vit an dud klanv ha mac' bagnet.

19

Zant Erwan, dre ho pedenno,
Hon zikouret en hon foanio ;
Goullet evit ho pugale
Iec'hed ar c'horf hag an ine.

20

Erwan gant an holl zo anvet
Zant Paeron an Avokaded ;

Dalc'hmad e oa prest da difenn
An dud dister hag ar bevien.

21

Paeron galloudus bro-Dreger,
Gwelet a ret, en hon amzer,
Gwirio an Iliz dispennet :
En han' Doue o difennet !

22

Ha, pa c'himp dirak hon Barner,
Beet ive hon difenner,
Ma vo d'imp laret gant Doue :
« Deut gavin da balez an Ne ! »

J. B. s. j.

Kantik Zant Erwan.

Marziale.

Tôn : Laez Breiz.

N'an neus ket e Breiz, n'an neus ket u- nan, N'an neus
ket eur Zant, e- vel Zant Er- wan, N'an neus ket eur Zant,
e- vel Zant Er- wan.

*N'an neus ket e Breiz. n'an neus ket unan,
N'an neus ket eur Zant evel Zant Erwan (Diou wech).*

'Neus ket en Argoad, na mui en Arvor,
Kouls ha zant Erwan 'vit an dud a vor.

N'an neus ket er vro, dre-holl e lerer,
Hag a ve ken mat 'vit al labourer.

'Neus ket kaerroc'h skouer d'an dud a lezenn,
Evit zant Erwan, skouer ar veleien.

Ha d'ar bevein gaez, ha d'an dud a boan,
N'an neus ket gwelloc'h evit zant Erwan.

'Neus ket eur chapel, hen beder enni,
Gant mui a galon 'vit er Vinihi.

Mar fell d'ac'h an tu da gât ho mennad,
Pedet zant Erwan, ha pedet ervat.

Pegen mat pedi, pa ver trubuilhet,
Elec'h ma pedas, ar Zant binniget.

Pegen brao pleustri an douar zantel,
Bet pleustret gwechal gant Zant Breiz-Izel ?

Eus a Gêrvarzin, stok d'ar Vinihi,
E oa ginidik Erwan Helouri.

Eno e c'hanas eun devez hon zant,
Er bla daouzek kant tri hag hanter-kant.

Epad e vue, eur shouer 'vit an holl,
Bevomp eveltan, n'efomp ket da goll.

D'e hanter-kant'la, e varvas neuze,
Hag a denn-askel, d'an Nenv e ine.

N'an neus ket e Breiz, eun Iliz ken kaer,
Hag e Iliz-Veur e kêr Landreger.

Evit Zant Tual, hon Zad binniget,
Dre urz zant Erwan, ec'h eo bet zavet.

Goude e varo, e gorf archedet,
En e Illiz-Veur, a oe douaret.

Eur bobl tud, bemde, adaleg neuze,
Deuas war e ve da bedi Doue.

Ha n'eo, ket hep mar, rak 'neus ket er vro,
Eur be 'ne gwelet mui a vurzudo.

Yan V, duk a Vreiz, 'vit hen enori,
Kaeraas e ve d'Erwan Helouri.

Ar be dismantret 'kerz an Dispac'h Vras,
'Zo bet hadsavet, kaerroc'h 'vit biskoaz.

Eskob Zant Erwan, An Otrou Bouché,
Hen eo a reas adsevel ar be.

Kenkouls ha Treger, Goelo ha Kerne,
A lakas o maen barz ar be neve.

Ma neus keut eur zant evel zant Erwan,
Kaerroc'h 'vit e ve, n'an neus ket unan.

E miz Mae, bep'la, ve eur pardon kaer,
Pardon zant Erwan, e kêr Landreger.

Neb a ya da Rom, ar Gêt-Veur gristen,
War be Pêr ha Pôl a lar eur bedenn.

Plijout d'hon zant braz, neb a fell d'ean,
A dle war e ve dont da zaoulinan.

Deut 'ta, Kristenien, deut da Landreger,
Ha ne gollfet ket, zur mai, hoc'h amzer.

Deut da Landreger, bet er Vinihi,
E c'hoarzo diwac'h Erwan Helouri.

Deut holl da bedi Erwan Kêrvarzin,
Hag e ve red d'ac'h dont war ho taoulin.

A bep korn ar Vro, kentoc'h a bep ti
War be zant Erwan, deut holl da bedi.

Hag eur vech ma po, gant kalon pedet,
En Nenv, gant Erwan 'vefet selaouet.

Pedomp Bretoned, pedomp zant Erwan,
Brasoc'h zant 'vitan n'an n'eus ket unan.

J. CLISSON, *Kure Landreger.*

Pardon Sant Ervoan.

War don Kanouen Breuriez ar Fe : *C'houi pere zo Kristenien.*

DISKAN :

*Pa neo hirie ho Pardon, sant Ervoan vinniget,
Pedet evit ho prois, evit ar Vretoned :
Hirie ann oll Vretoned ho ped galon vad :
Reit dre, otro sant Ervoan, reit d'e oll ho mennad.*

Pa deu miz Mè da vleuiian el liorzo ar vro,
Miz Mè, miz ma Mamm santel, pa deu miz Mè enn dro,
Me gleo, war zu Landreger, ar pemp kloc'h bras o son,
Kleier Ervoan ha Tual o c'helvel d'ar Pardon.

M'ho kleo, otro sant Ervoan, ô ma Sant binniget :
Bep'la me dei d'ho Pardon keit ha m'allin kerzet ;
Bep'la me dei d'ho Pardon, rak c'houi ma chileoo,
Pan hoc'h Breton evel-d-on hag eur zant enn Envo.

O ! nag on bet evurus o tont, daleg bihan
Gant ma mamm da Landreger, vit gwelet sant Ervoan !
— « Neb a bedo sant Ervoan, e lere ar re-goz,
'No gras Doue er bed-man ha lod er baradoz. »

Gwech-all oa el Landreger eur be euz ar c'haeran,
Be sant Ervoan Helouri. gret gant Duk (1) ar vro-man.
Eno ann holl Vretoned a deue da bedi,
Eno roe sant Ervoan mennad da bep-hini.

(1) Roue Breiz e vel gret ann Duk annehan. Heman oa hanvet Iann V.

Eno zo bet burzudo, vel ne oa ket gwelet
Nag en Breiz, nag en Bro-C'hal, testo zo da laret :
Eno Rouane (1) ar vro a deue dierc'hen,
Da glask ive ho mennad digant *Tad ar bevien*.

Gant ar Revolusion e tigoebas en kear
Tud dife hag a dorras eur be a oa ken kaer.
Ne vanas gant sant Ervoan, a rez gant ar pave,
Ne vanas met eur min ru, elec'h ma oa e ve.

Adzavet eo a neve be ar Zant binniget...
Bennoz Doue d'ann Eskob (2) en deuz-han adzavet !
Breman c'hoaz ar Vretoned a dei evel gwech-all
Da welet o sant Ervoan, enn Iliz sant Tual.

Na pegen kaer eo gwelet, en devez ar Pardon,
Paroujo koant bro Treger, gant ho frosesic'n !...
Reit d'e pez a c'houlennont, o ma Sant binniget :
N'eus ket d'ho karet gwelloc'h en touez ar Vretoned.

Hirie eo diaes bevan en kêr evel war mez ;
Dre-oll zo poan ha trubuil, ha dre-holl dienez !
C'houi oar petra zo kiriek, ô Zant Patron hon bro :
Ar pec'hejo a dal d'imp eur walenn ken garo.

Gant Kamlez ha Koatreven, Langoat ha Perwénan,
Trezeni ha Lanvilin, Priel ha Plouvouskan,
Na kaeran prosesion, na kaeran banielo !
Pep'la teuont d'ho Pardon gant sent Patron o bro.

Na pegen kaer eo gwelet, en de-se, o tremen
Penn sant Ervoan vinniget douget gant beleien !
Pep pla ec'h a d'ar chapel en doa zavet gwech-all
Ha d'an Itron Varia ha d'hon Tad sant Tual.

Bep'la pa deufet ermaes deus Iliz Landreger,
Pan efet d'ar Vinihi gant prosesion kêr.
Gret eur zell, ô sant Ervoan, eur zellik war ho pro,
Ma vo furnez gant ann dud hag ed 'n o douaro.

Ni bedo a greiz kalon enn chapel Kervarzin,
Rag eno hoc'h eus pedet gwech-all war ho taoulin ;
Eno eo hoc'h eus laret hoc'h ofern diwezan,
Pevar de, o sant Ervoan, rôk kuitat ar bed-man.

War disteraat, zionaz ! ec'h a Fe Breiz-Izel :
Ne doujer ken da Doue na d'he lezenn santel.
Adlaret c'hoaz d'ho proiz, ô ma zant binniget,
Eo ret senti ouz Doue vit kaout evurusted.

Leret d'he kerzet eeun trezeg ar baradoz.
Ha bean gwir gristenien evel o zado koz.

(1) Ann Duk Charles de Blois.

(2) Ann otro Eskop Bouché, hanvet *Eskop sant Ervoan*.

O ! neuze ni a welo o tistrei en hon zouez.
Ar peuc'h hag al lealded ha gant-he levenez

D'eomp-oll eta, Bretoned, war be hon sant Ervoan.
D'eomp-oll da laret d'ean hon zrubiilh hag hon foan ;
Ha gant Fe grenn hon c'halon ha bolante Doue,
Ni welo c'hoaz burzudo en dro d'ar be neve.

LAOUENANIG ZANT ERVOAN.

En enor da Zant Ervoan.

Ton : *O ma ine kanomp bemde.*

DISKAN

Otro Zant Ervoan viniget
Enor ha zikour hon bro
An nep ho ped a neus bepred
Eun difenner en nenvo.

En hon zouez eus a Zant Ervoan
Bras eo ar madobero,
O sonjal ennè peb-uoan
A wir-galon a laro :

En nenvo evel en douar
Zant Ervoan zo galloudus,
Hag e galon d'an neb hen kar
Zo mad ha trugarezus.

Ia, pep hini da Zant Ervoan
Neus nemet en em westlan,
En peb ezom hag en peb poan
A vo zikouret g'antan.

Evit treo an douar nec'het
Gant ar glao pe ar zec'hour
Da Zant Ervoan omp diredet
Bepred hon eus bet zikour.

D'ar beleg, d'an den a lezen,
Avokat, beleg zantel,
Zant Ervoan roskouer, sklerijen,
Ma voint en o c'harg fidel.

Ar vam a lavar eur beden
Da Zant Ervoan hep beure,
Kalon he mab vel eur rozen
A zigor war-zu an ne.

An iutanvez paour en he foan.
Gant he famill hep zouten

En em erbed da Zant Ervoan,
Ha Zant Ervoan he difen.

Ar bugelik kêz emzivad
Tad ha mam gautañ kollet
En Zant Ervoan a gav eun tad
Gant eur zikour vad bepred.

Ar zoudard galvet d'an arme
Keut kuitat, da Zant-Ervoan
A ia da bedi, ha neuze
A greiz he galon a gan :

Ar martolod war ar mor don
Gwall hujet e vag vian
A zo fianz en e galon,
E sturier eo Zant Ervoan.

Al labourer devot d'ar zant
A gav skanvoc'h an arar
Kalsblotoc'h ve ar park pa blant,
Pa : ko e bal en douar.


An devezour an den a boan
Bemde kent mont a'e zezev
Mar deu da bedi Zant Ervoan
A gano gant levenez.

Ni oll a zo devezourien
Er bed-man, ha tud a boan.
Ha c'noui dizprizf' hon feden.
C'houi otro mad Zant Ervoan ?

Kalz ac'hanomp hep pell dale
Dle achui o devez
Gret d'imp mont da ganan en ne-
Goude kanan er vuhe.

Gwerz koz Zant Ervoan.

Diskan.



Da heuilh er-vad ho ver-tu-iou, Ha da vont eun de dan nenvou.

Chillaouet holl, bras ha bian
Bue an Otro Zant Ervoan,
Bue Zant Ervoan Heloury
Disket-hi holl, me no supli.

Ervoan Heloury zo ganet
En Kervarzin, ti biniget.
Damdost d'ar gêr a Landreger
Eur c'hart-lew pe wardro eus
[kêr].

E dad ganet er Vinihy
A oa e hano Heloury,
He vamm oa Azo ar Genkiz
Ho daou fur ha nobl en peb giz.

Arog ma oa Ervoan ganet
D'he vamm Azo oe diskleriet
Penez ar bugel a douge
A vije eur zant braz eun de.

Ha pa oe ganet ar bugel
A oe gwelet hep dale pell
A vije leun a zantelez
Diskoe rae kaout kals a furnez.

E vamm, pa oa en oad eus-ze
Diskas d'ean pedi Doue,
Ha goude ro eur mestr d'ean
Evit diski leun ha skrivan.

Lakat a rejont o bugel
Entre daouarn eur mestr zantel,
Jan a Gerc'hoz a Bleuvian
A diskas al latin d'Ervoan.

Seul-vui greske e ziskamant,
Seul-vui greske furnez ar zant,
Pa na vije gant e studi
E vije kavet o pedi.

Pe oa a barzek vla oajet
Da Bariz a c'hoantas monet,
Eno neuze vije kavet
Ar skolio ar muian brudet.

Eno oe gwelet o trec'hi
Ar re oa gantan er studi,
Dre e zantelez o zrec'he
Ha dre e spered lemm ive.

Adalek neuze a roe
An aluzen d'ar paour bemde,
Ar c'hnig a vije roet d'ean
A gase da di'r bevien glan.

Neuze a rae gwelet ive,
Pegen zantel oa e vuhe
Na debre ket bara gwiniz,
Med bara hei pe bara griz.

Gret gantan e filosofi,
A diskas an theoloji,
Ha da bevar bla war-n-ugent
Oa desket ha leun a skient.

'Vit deski lezen an Iliz
A guita an gêr a Bariz
'Vit mont d'ar ger a Orleanz
Lec'h ma oa tud desketan Franz.

Eno gant doktored desket
A deskaz lezenno ar bed [mad
'Vit goût an tu da varn dalc'h-
Ar prosejo gant justiz vad.

Er gêr-man a dilez a greun
Ar c'hik, ar gwin, dre binijen,
Ouz e zec'hed dour a eve ;
N'em rei a raes oll da Zoue.

Studian rae lezen Doue,
Pedi rae jve kalz bemde,
Ouspen yun a rae bep gwener,
Vit enori marv hon Zalver.

Gout a rae penoz ar skient
N'all ket e-uann ober zent,
Mar na unaner hep paouez
An œuvro mad hag ar furnez.

E studi gantan achuet
Da varner bras a oe laket,
Da varner-iliz en Raon
Gant Moriz an arc'hoiagon.

Eskoh Treger nebeut goude,
Pa glevas komz euz e vue
Hen pedas da dont davet-an,
Rak kalz istim nevoa vit-an.

Ar zant gant humilite vras
Ouz mouez e eskob a zentas,
Ha pa oe d'e vro retornet
Oe gant e eskob beleget.

E eskob hen lakas raktal
Da varner, pe ofisial,
Er memez amzer ben anves
Da berson e parouz Tredrez.

Hag eiz vla goude kement-man
Oe roet Louanek d'ean,
Aa barouz-ze a oa karget
A viso, a dud direglet.

Med Zant Ervoan a gelennas
Ar bobl-ze gant karante vras,
O prezek, o katekisan
Echancnas krennar barouz-man

Pa oa barner ec'h alie
Lies a wej dre garante
An daou rumm da n'em gordi
Da chom e peuc'n hep prosezi

Ha pa renke rei eur setanz
Hen roe just, en konsianz.
Rag barn a rae herve Doue,
Hep zellet ouz nep kalite.

Na oa ket hepken barner mad,
Zant Ervoan oa c'hoaz avokad,
Kaoz ar bevien a difenne
Hep goulen uetra digant-e.

Ma garfe 'r justiz zo breman
Ober evel ar barner-man,
Na ve ket ken alies gret
Na displealded na pec'hed.

Mar boa parfet den a justiz
Oa c'hoaz parfet den a iliz,
Ne glaske nemet gloar Doue
Ha deski d'an holl hent an he.

Lies a wej e prezege
Geteg pefer gwej en eun de,

Ar Bazion a brezegas
Seiz gwej de eurgwener ar groas
Neo ket hepken da Louanek
Pe da Dredrez ye da brezek,
Mez c'hoaz d'ar paroujo wardro
Ha dre Vreiz en Eskoptio.

Gras Doue dre e zarmoniou
Denerae ar c'halonou
A rae d'ar bec'herien vrasan
Dont d'en em gonvertisan.

O vont da brezek e kavas
Eur pout goloet gant dour bras.
Hag an dour a n'em stankas
[kreen

Evit hel lezel da dremen.

Ken bras oa e zevosion
Ma fonte kazi e galon
En iliz en-pad e beden
Ha pa lare an oferen.

Glebian rae lies e zillad
Gant an daero n'e zaoulagad,
Pa vige c'h'ober e beden
Arog laret an oferen.

Eur wej epad e oferen
A zo bet gwelet ust d'e benn
Eur flamm en dan eus an envo
Keit ha ma oat er goureo.

E di a oa ti ar bevien
D'e-oll a rae an aluzen
O lojan rae hag o gwiski
Ha rei d'e c'hoaz boed da dibri.

Eur wej a roas d'ar bevien
E holl ed hep menel greunen,
Dre eur miraki a oe kavet
E c'h'rignel kenkent leun a ed.

Eur veaj-all c'hoaz n'en devoa
Nemet eur gwennegad bara,
Hag hen o vont d'hen lodenni
Hep miret tamm bet da dibri.

Ha goude ma nevoa roet
E dam da bep paour vit e bred,
A vanas e vara gant-han
Kement evel rog hen troc'han.

Chanchet. tud avarisiuz
Bezef ouz ar paour truezus,
Dreist-muzul Doue a zo mad
Kenver ar re deus kalon-vad.

Hen oa tad an emzivadad,
Difenner an intanvezed.
Zouten an holl dud ezomus
Ha konfort ar re hirvouduz.

Ar zant ken mad vit peb unan
A oa rust out-han he-unan
E gorf a gastize bemde,
Vel eun enebour hen zelle.

War e gorf santel a douge [de
Eуроched reu dalc'hmad noz
E wele oa 'ntam plouz hep k'n
Gant ar bibl zakr dindan e benn.

Bemde ar zant 'n em skourjeze
Ha kazi bemde a yune
Amzer e gousket a oa berr.
Hag e vevanz a oa dister.

Erfin ar zant a zo marvet
War-dro hanter kant vla oajet:
Glac'haret bras oa tud ar vro
Pa oa klevet a oa maro.

A bep tu an dud a d'ue
Da welet korf an den Doue,

Ha hed tri de eo bet chomet
Hep gallet bean douaret.

Zant Ervoan a zo bet marvet
E Kervazin lec'h oa ganet.
An Eskob a rès urz raktal
D'he douari er gatedral.

En miz mae a varvas ar zant,
Er blavez t i ha trizek kant,
Dre e vuzudou ec'h eo bet,
Gant an iliz da zant laket.

Otro Zant Ervoan viniget
Pa-z-oc'h gant Jezuz kurunet,
Pedet evid-omp en henvou
Ma heui fomp holl ho vertuiou.

Graet m'hon devo digant Doue
E zoujanz hag e garante,
Ar c'bras d'he serviji ervat
Ha da gaout holl eur maro mat.

Pobl ar Vinihy bet bepred
Devot d'ho patron biniget,
E man enn envou o pedi
Evit parouz ar Vinihy.

Breiz-Izel da Zant Ervoan.

WAR DON : *Na n-euz ket e Breiz.*

DISKAN :

Otrou zant Ervoan, klevet hon feden,
Eus lein an Nenvou reit d'imp hon goulenn. (bis).

1. Ni ya da ganan, holl bras ha bihan,
Gloar hag enor d'ac'h, Otrou zant Ervoan.
2. Zant Ervoan e Breiz dre-oll zo brudet,
E Treger, Leon, Kerne ha Gwenet.
3. Gant tud a bep stad, uhel hag izel,
E peder Ervoan, a dost hag a bell.
4. Vit an holl e oa leun a garante.
Evel gwir vreudeur o degemere.
5. Eun de e teuas Jezus e-unan
Da c'houll aluzenn digant zant Ervoan.
6. Gret en deus ar mad hed e holl amzer.
Breman toug en Nenv eur gurunenn gaer.
7. Bep bla zant Ervoan a deu da welet
Al lec'hiou zantel lec'h ma oa ganet.
8. De e bardon bras penn an den zantel
A ve douget c'hoaz beteg e chapel...

9. Pegen brao pedi, sammet gant ar boan,
Er chapel elec'h ma pede Erwan.
10. Na n-eus ket e Breiz eun iliz ken kaer
Hag an iliz-veur e kaer Landreger.
11. Evit zant Tual, ho tad biniget,
Otrou zant Ervoan, c'houi n'euz hi zavet.
12. Eno 'man ho Pe ha n'eus ket er vro.
En defe gwelet mui a vurzudo.
13. Gant fiars eta, ho pedfomp bemde,
Hag evel doc'h-hu ni garo Doue.
14. C'houi oe avokad pa oac'h er bed-man.
Bet hon avokad en Nenvou breman.

F. G.

Kantik Goeloiz da Zant Ervan.

WAR DON : *Brœudeur, ni gleo ho Klemmo?*

Eman miz Mae vleuiant el liorzo ar vro,
Ha pardon bras zant Ervoan a zo yê distro :
Me glev war du Landreger ar pemp kloc'h bras o son,
Klec'hi iliz zant Tual o c'helvel d'ar pardon.

DISKAN :

*En Breiz, Otro zant Ervan, c'houi n'hoc'h eus ket ho par
Ha kerkoulz ha Trêgeriz, tud vad Goelo hen lar.
Reit eta a'ho Kweloiz, reit ho mennad bepred,
Hag deuy gant ar pardon war ho pe benniget.*

Gwech-all goz, terve leter. c'roui c'heus pedet devot
En iliz an Abati hag en chapel Kerfot :
Gwech-all 'teuech alies da welet hon zud koz
Hag ho pedenn war Welo a denn bepred bennoz.

M'ho kwell war hent Sant-Ouren ha kastel Boloi,
War hent Lanzerf ha Plonez o tont d'a Abati.
Di 'teuech da diskuizant en eur bedi bepred ;
Eno oa menec'h zantel, ho kwellan mignonet.

Eun devez ha beure mad e teuec'h deus Rabon.
P'arriac'h 'tal Pont al Lef gant ho mevel Hamon.
An dour oa bras en de-se vel ne ve ket bemde :
Ar pont a oa goloet hag an daou benn ive.

M'ho klev, Otro zant Ervan, p'arriac'h gant ann dour,
O laret en eur c'hoerzin da Hamon 'N Oberour :
« Deus war ma lerc'h, ma mignon, deus warlec'h Dom Ervan,
« Doue zo gan-imp en hent, ni dremeno diboan. »

War an dour bras o redek en zaonenn don al Lef,
'C'heus gret neuze zin ar groaz n'eur zellet ouz an ef.
Dioustu e paouez ann dour da redek er zaonenn,
Ha dizec'h gant o mevel hoc'h eus gallet tremen.

En Goelo, o zant Ervan, c'houi n'hoc'h ket ankouet !
Lïes vel an holl mammou, ma mamm deus d'in laret :
« Bet devot da zant Ervan, ha pedet anezan,
« Ha ni yelo d'e bardon goude ho pask kentan. »

D'abarde 'rôk ar pardon me c'he en eur redek,
Da droc'nan b'arz ar zaonenn eur vaz vihan halek.
Ha kenkent hag ann evned me a zave zeder.
Ha zin a groaz n'em c'herc'hen e c'hen da Landreger.

A beb korn a vro Goelo 'teue pelerined,
Enne zorn gant bep unan e vaz he c'haeled.
Holl e taoulinemp joauz pa welem o tremen
Penn zant Ervan venniget douget gant beleien.

Tud vad, it da vro Goelo ha dre holl e kleofet :
« Aman e bet zant Ervan, aman eo tremenet. »
Roud e droad a zo chommet en mein bras an hinchou,
Hag e ano benniget en kreiz ar c'halonou.

Ni goeloiz deus fianz en zant Erwan bepred !
Pa ve re vec'hiet ar vro, vemp klevet o laret :
« Dembholl da gaout zant Ervoan, kroaz Kerfod ar c'hentan :
Hon zud koz deus bet bepred ho mennad digantan. »

Na kaeran prosesiono veze gwelet neuze
O tremen ponchou Tréger en eur bedi Doue,
Na kaeran prosesiono tîredekek e kêr
En eur ganan meulodi zant Erwan Landreger !

D'emp c'boaz, demp. tud vad Goelo, da welet zant Ervan :
Zant Ervan hon c'bar ive vel n'en eus ket unan.
Allaz ! kaer zo labourat, ar bed a zo diaes :
Lec'h o neus ket doujauz Doue e kaver dienez.

Demp vit ar bla d'ar pardon, demp da welet e ve :
Ar paour kouls hag pinvik hen deus gret a neve.
Demp gant Eskop zant Ervan (1), demp betek Landreger :
Ni vo joauz hon c'halon, pa distrofomp d'ar gêr.

LOIT. S. E.

Kantik bugale Breiz-Izel da Zant Ervoan.

WAR DON : *Ar Mousik bian !*

Azo ar Genkiz a l'ere	« Laret zo d'in abeurz Doue, « Pe oac'h biban ma bugel : — « Da vab Erwan a vo eun de « Eur zant braz en Breiz-Izel. »
D'he mab Erwan Kervarzin :	
« Mabig, emei, noz ha beure,	
« C'houi bedo war ho taoulin.	

(1) Otro Eskop Zant-Brieg ha Landreger a gar kement ar zant binniget, na rer breman *Eskop Zant Erwan* anezan.

